

6

Pa voar daou o touguen ur sam e vez cavet calz scàn voc'h.

Mes, neo qet a voalc'h dimezi; ret eo ivez sonjal mad,  
Ober boneur ho pried qer, dre bep soign, dre bep seurt stat;  
Sonjit mad en amzer eurus ma voac'h oc'h ober al lez,  
Hac e vezot meurbet contant atao epad ho puez.

Caer ho pezo cavet abec ha caqetal ar merc'het,  
Me ho quello un deiz benac o tonet d'o zarempret;  
Neuze, douc evel un osnic, c'houi lavar d'ho mestres:  
Va c'halonic qez me ho car hac ho caro da james.

Qent dont da achu va chanson, e regetàn ouz Doue  
Evite oll peb seurt boneur etro pado o bue  
Prosperite, contantamant, anfin tout o desiriou  
Ha dreist oll ma vezint ornet demeus an oll vertuziou.

FIN.

~~~~~

## CONSTANÇ DAOU C'HALANT SEPARET

*Var un ton anavezet.*

**B**RASSA chagrin var ar speret  
A oufe bigen beza,  
Eo caret ba beza caret,  
Ha rancout dispartia:  
An diou galon a vez mantret,  
Flag o diou e tizec'hont;  
Caer o deus beza separet,  
En em garet a rancout.

Resista oc'h ar garantez  
A zo control d'an natur,  
Nep ne zelaou qet e mouez

7  
 A zo ur monstr a dra zur.  
 Hi a so certen ar guenta  
 Eus a lezennou ar bed :  
 Petra dâl sonjal resista ?  
 Mestres e vezo bepret.

Ar c'hoajou z'o d'al lapouset,  
 D'an dour eo ar rivierou ;  
 Ar mor bras a zo d'ar pesqet ;  
 Ar firmamant d'an astrou ;  
 Va c'halou zo d'ar garantez,  
 Evit caret emeus-hi,  
 Me zant hac a gleo e mouez,  
 Senti a rancân outi.

Nep a garân var an douar  
 Am c'har-me ive d'e zro ;  
 Biscoas ne meus bet ar glac'bar  
 D'e guelêt ur vech e dro.  
 Hon daou e zomp atao contant  
 Evel an durzunellet,  
 Ha neus get c'hoas bet en instant  
 Na vemp-ni en em garet.

Un destin, var a lavarer,  
 A so o regli peb tra ;  
 En a ra hirio hor boneur,  
 Varc'hoas hor chagrin vrassa.  
 An destin cruel ha barbar  
 En deus hon dispartiet ;  
 Mes, en despet d'hon oll glac'bar,  
 Fidel oump atao chomet.

Leusqet en deus, en e arrach,  
 E oll vinim da redet,  
 Hac e clasq pilat hor c'hourach  
 En deus en guell cimantet.

8

Destin ebet, en assuranc,  
 Ne doro hor c'harantez :  
 Mont a rai hor perseveranc  
 Qeit a ma zay hor buez.

Lezomp an destin pretantet  
 Da uza e oll ardou ;  
 Lezomp an arne egaret  
 Da ober e c'hoariou ;  
 O daou e zint qer variant,  
 Na oufet fiziout enno ;  
 Mes hor c'harantez so constant :  
 Netra james n'e zoro.

En em garet en honestis  
 Hon eus great a dra sur,  
 Ila tremen gyê hor yaouanqis,  
 Ha gant calz a blijadur.  
 Ral eo bremâ m'en em velomp,  
 Abaoue hon disparti ;  
 Evel ato en em garomp,  
 Mes hep en em frecanti.

Coust a ra da vouir mignonet  
 Ober ur seurt disparti ;  
 Evit deomp ezeo coustet,  
 ▲ ellomp da asuri.  
 Mes na gollomp qet a fizianç  
 Ni a en em gavo c'hoas,  
 Hac a zisquezo hor c'honstanc  
 Partout evel a biscoas.

F I N.

---

E Montroulez, e ty LÉDAN, e traon ru ar Vur.